

# Brezhoneg, yezh varv ?

**E deroù miz Genver en doa disklêriet Pierre Maille, prezidant kuzul-departamant Penn-ar-Bed, en ur pennad-kaoz gant ar gazetenn *Ouest-France*, "le breton a déjà disparu en tant que langue d'usage, à part pour un nombre réduit de locuteurs."**



Andreu ar Gag ha Pierre Maille e lid Prizioù 2007 France 3.



Manifestadeg "Deomp De'i" 2012, nepell diouzh Ti ar c'huzul-departamant.

**a** balamour da se, emezañ, n'en deus ket departamant Penn-ar-Bed da ober muioc'h evit ar brezhoneg. Trawalc'h a vefe gant ar pezh a vez graet betek-henn : gant ur budjed 2,2 vilion a euroioù, digemm abaoe meur a vloaz, e vez skoazellet ar c'helenn, dreist-holl, dre skoaziadennoù da gevredigezhioù eus an departamant. N'en defe ket departamant Penn-ar-Bed, hervez Pierre Maille, da glask ober eus ar brezhoneg ur yezh implijet muioc'h er vuhez, evel ma vez graet evit yezhoù evel ar c'hembraeg pe ar c'hatalaneg, emezañ c'hoazh.

## UN TAMM REUZ

Un tamm reuz o deus graet ar c'homzoù-se e Penn-ar-Bed. Ret eo lavaret ivez e teu ar c'homzoù-se goude ma vefe bet krennet ar skoazell roet d'ar brezhoneg gant an departamant-se ha ne gresk ket ken ar sammad arc'hant lakaet evit ar brezhoneg e budjed an departamant abaoe un nebeud bloavezhioù. E diskar-amzer 2012, da skouer, e oa bet divizet gant ar c'huzul-departamant paouez da arc'hantañ ar Glaskerien ha Treizherien Soñjoù, a laka ar vugale a zesk brezhoneg er skol e darempred gant tud deuet a zo ar brezhoneg o yezh kentañ. Hag en diavaez eus tachenn ar skolioù (Diwan, kentelioùigoù e klasoù zo, er skolioù kentañ derez), ne ra ket an departamant kement-se a draoù evit ar brezhoneg, estreget lakaat

enskrivadurioù e brezhoneg war ar paneloù-hent.

## RESPONTOÙ

E-touez an dud o deus respontet da zisklêriadennoù Pierre Maille hag a zo bet embannet o c'homzoù a-wel d'an holl, e c'haller menegiñ Charlie Grall, eus Karaez, en deus skrivet e oa komzoù prezidant Penn-ar-Bed "*un taol kontell ouzhpenn*" da ziskar ar brezhoneg. Lizhiri all zo bet kaset da Pierre Maille c'hoazh : gant Andreu Lavanant, prezidant kozh Diwan, gant Div Yezh, gant Kevre Breizh, gant Ai'ta... An holl anezho o kavout abeg e komzoù prezidant ar c'huzul-departamant hag o c'houlenn ur politikerezh mennet da gas hor yezh war-raok. Ha goulenn a rae Andreu Lavanant ivez daoust ha komz a rae Pierre Maille en e anv personel pe en anv dilennidi all an departamant, rak n'eus bet diviz ebet war se e-touez izili ar c'huzul-departamant. Un tammig manifestadeg a oa bet aozet war ar prim ivez dirak ti an departamant da-geñver abaden an hetoù, d'ar 17 a viz Genver.

## SOÑJOÙ AR BOLITIKOURIEN

E-touez ar bolitikourien avat n'eus ket bet kement a dud o sevel o mouezh. "*Komzoù mezhus*" a rae UDB eus komzoù Pierre Maille, met n'hon eus ket gwelet penna-doù embannet gant strolladoù politikel oc'h embann sklaer ur soñj disheñvel diouzh ar c'homzoù-se. Un den avat en

deus kemeret ar gaoz en un doare sklaer war ar poent-se : Andreu ar Gag, kuzulier kozh kanton Daoulaz, hag a oa karget eus ar brezhoneg er c'huzul-departamant etre 1998 ha 2011. Hervezañ ez eus bet graet traoù mat en amzer dremenet met bremañ eo sac'het an traoù, n'eont ket war-raok ken, abalamour ma n'eus "*den ebet ken*" karget eus teuliad ar brezhoneg en departamant. En emvod ar c'huzul, e miz C'hwevrer e oa bet lakaet ar gaoz war budjed ar brezhoneg ha difennet e oa bet ar politikerezh a zo bremañ gant an departamant gant div zilennadez eus ar Strollad Sokialour : Maryvonne Blondin ha Chantal Simon-Guillou. Ne oa bet klevet nemet kuzulierez Brieg, Yvonne Guillou (UMP), o kavout abeg e komzoù Pierre Maille hag o tisklêriañ "*vous reléguez le breton au rang de relique.*"

## PRIENTIÑ DIGRESK AR SKOAZIADOÙ ?

En em c'houlenn a c'haller petra a felle da Pierre Maille lavaret en e bennad-kaoz gant *Ouest-France*. Met pa weler en doa divizet departamant Penn-ar-Bed paouez da arc'hantañ ar Glaskerien ha Treizherien Soñjoù e 2012, pe ar skoazelloù d'an embann pe d'ar c'hoariva e brezhoneg, er bloavezh-se ivez, e c'haller soñjal e klask en em zidamall, ha reiñ abegoù evit digreskiñ ar skoazell d'ar brezhoneg, bremañ ha marteze muioc'h c'hoazh en amzer da zont.